

492 C

# CHANSON POTRET PLOUILLAU

---

Var ton : *Adieu, Pontreo,*

M'am bije speret da gomprenn, evel a meus fantazi,  
Me a vije n'em impliet da zonet da gomposi  
Eur c'himiad leun a c'hlac'har, gret da gonscrivet  
[yaouanq]  
0 deus tennet ar billet ebars er blaves prezant.

Ebars er bla mil eis cant c'hoec'h, ar bemb a vis guen-  
E zeo digueet adare eus a baros Plouillau [golo,  
Tud yaouanq evit an arme, tud deus an terrupla ;  
Glac'haret éo oll ligne, p'o guelont o partia.

Da bartia gant an actif ne zeus quen nemet pevar ;  
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan Ar Meledar,  
Ha Yannic Prat, eus ar Goajou, ha Pipi an Aveant :  
Pevar den eus ar re vrava, corfou kær ha tud vaillant.

Ervoannic Jacob a lare en deiz-se d'he gamarad :  
Emâ a zo eun devez trist hac a ra din calonad !  
Guelet va mam baour o vouela, ha va zad kès desolet !  
Va c'halonic ebars em c'hreis zo dija casi rannet.

Cals a sonchfê dê, marteze, pennos e vent eur poultron  
Em be aoun rac ean ten fuzuil pe rac eur voulet canon  
P'otramant aoun rac ar fatiq, o vale dre an hentchou,  
Pe gousquet var eur guele can ebars er c'hordegardou.

Douguen va dillet var va chouq, va fusuil ha va zabren,  
Bale bemde a guer da guer dre ar fanq hac ar vouullen  
Ha goude e fin va beac'h rencont marteze campi,  
Pe gousket var an douar ien, pe otramant biouaqi.

Tor o deus an nep a sonch-se ; ma c'haijent lenn em  
Evit guelet va bolonte ha va inclination, [c'halon  
Ma na folje nemet va goad, me en scuille tout joaüs  
Evit souten hon Impalaër, eun tad quer carantezus !

Piou na gombatfe quet gant eun Impalaër chrizten ;  
Eur gaus ker just hag e hini zo facil da souten,  
Pa somp memprou da Jezus Christ, soudardet an Aviel  
Bugale da Zoue an Tai, tamplou d ar Speret-Santel.

Arça eta, camaradet, quen quitaad euz om c'homtre,  
Demp ni da ilis Plouillau da supplia hon Doue  
D'hor preservi demeus goal chans pa vézimp en armeou  
Ha da gonsoli bars er guer, hon tadou hag hon mamou.

Adieu dec'h, Antro Sant Millau, patron euz ar barous-ma  
Adieu querent ha mignonet cessit brema da vouela.  
Pedit Done hac ar Verc'hez da gavet soign ac'hauomp,  
Hac hon Æl mad d'on c'hondua partout elec'h ma ze-  
[fomp.

Adieu, va mab, va esperans, eme an tad desolet ;  
Piou a gonsolo va dud paour goude ma vi partiet ?  
Pa vin accablet gant cozni, me vo clevet o laret :  
Ma vije ma mab quez er guer, en dije va soulaget.

Clevit ar vam o quimiad ive digant he buguel :  
Deus ama c'hoas, ma boqin eur vech quent eguet mervel  
Aben ma retorni d'ar guer me vo ed euz ar bed-ma,  
Deus ama etre va divrec'h evit ar voech diveza.

A guichen ar momet fatal ma c'heus tennet d'ar billet  
Beb nos vel ma fot di coussuet, me a seblant da velet  
O tont eus eur gombat sanglant var eur chariot bleset,  
Pe tolet en eun hospital, gant an oll abandonnet.

Ar zoudard yaouanc contristet c'hoas quen eguet partia  
Evit essat o c'honsoli a lavar, en eur vouela :  
Tavid va zad ha va vam baour, ha bevit en esperans,  
Doue, tad a visericord, a zo bras e brovidans.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,  
Gras Doue hag ar Verc'hez, e vez fin do clähar,  
Evit merq eus hon vaillantis, gant lore deus hon tocou  
Ni a zistroyo prest d'ar guer evit sec'hi o taëlou.

Adieu da baros Plouillau ha de oll habitantet  
Adieu d hon oll anaoudeuez, ha querent a mignonet,  
Ha ma na memp quet ar bonheur er bet·ma d'en em velet  
Gras deomp ebars er barados assambles d'en em gavet.

(Propriété).

*Lannion, librairie Mlle C. DUCHEMIN.*

# GWERZ GAREN AR BRIS

## Var eun ton trist

Person Caouen a lavare,  
E prôn an ofern, eur sul a oe :  
« Otro Doue, emean, Caouenniz ,  
Eur c'helou trist zo n'oc'h illiz  
Arri a zo eun decret neve  
Deut demeus abeurs ar Roue,  
Da laret e vo ret cavet  
Ar c'hoifou guellan eoz ar oerzet.  
En hano Doue, me o supli,  
En Lanhuon n'em geved c'hui.

Cri vije ar galon, ma na oelje,  
En ker Lanhuon, neb a vije,  
O velet Caouen ha Ploubér  
Bihan a bras e tont en ker ;  
O voelet Caouenniz o velab  
Quen a felle de fatitian.  
Ploubériz a neveus tennet,  
Gant Caouenniz van ar billet ;  
Manet ec'h e gand Caouenniz  
Digoueet e da Garen ar Briz.

Garen ar Bris a deplore,  
Ne gavje den e consolje :  
Ne gave den d'en consoli,  
Merd e baéron pa oa arri :  
« Ma fillor paour, ne velet quet,  
Serviji ar Roue zo ret.  
Me ne rajen fors vit partian,  
Penevert ma mam a zo clan :  
E man var e guele sez vla-zo  
Ha ne deus nemerdon var he zro.

Garen ar Bris a hirvoude,  
An nor var e vam pa diore :  
« Sevet, ma mam baour a lesse,  
Ma rin c'hoas eur vech o quele.  
— Pe te zo skuiz ouz ma guelet ?  
Pe te zo squis gant ma c'hlévet ?  
— Ne non ket skuiz ouz o guelet,  
Na quen neubeut gant o klevet :  
O tenna d'ar billet ez on bed,  
Zoudard 'vit Caouen on laquet. »

Pa voant o daou o teplori,  
E c'hantre e gamarad en ti,  
Hac a lavaraz evel-hen,  
'Neur antren, d'ar paour Garen :  
« Hastit ma c'honsort depechan,  
Ma c'hefomb da Guengamp da lojan.  
— Me ne rajen fors vit partian,  
Penevert ma mam a zo clan :  
E man var e guele sez vla-zo  
Ha ne deuz nemerdon var he zro ».

Garen ar Bris a deplore,  
An nôr var e vam pa serre ;  
« Me lar dec'b ma mamm, kenavo,  
Er barados ni n'em velo. »  
Da vates ar person a laraz,  
E presbyter Caouen pa arriaz :  
« Dalet, matez, ma alhoueou,  
Soignit ma mam baour a vechou.  
« Lequet oc'h alhoueou lec'h ma querfet  
E lec'h ma o lequefet o c'hefet. »  
Neuze e larraz d'ar person,  
O sonjel cat consolation :  
« Person Caouen m'ar em c'heret,  
Ma alhoueou digane-me quemeret ;  
Recommandet ma mam'n hoc'h ofern bred  
Ma iel an dud vad d'e guelet  
— Lequet eme person Caouen,  
A layaras d'ar paour Garen,  
Lequet oc'h alhoueou lec'h ma querfet,  
Elec'h ma o lequefet o c'hefet. »  
« Otro sant Garen, ma faeron,  
Gret evidon eun donézon :  
Lequet o cleier da zon canvo  
D'am mammic paour pa vo maro,  
' Vit ma c'hellin, pa o c'hlévie,  
Donet d'ar gær d'he c'hinterri :  
Rac pa e dilezet, ha hi clan,  
Gand an dud, pa bartian,  
E vo ive pa vo maro,  
M'ar ne vent quet var he zro.  
Eun de pa oa Garen en arme,  
Pemb cant leo demeus e gontre,  
E scoas eur c'hlaouen n'he galon,  
O clevet cleier Caouen o son.  
Ar Zant a nevoa roet dean  
Pez neva goulet digantan ,  
Rac ar c'hléier a zone canvo,  
D'e vamm baour e voa maro.  
Ractal e laraz d'he gabitén,  
En eur ouela evel-hen :  
« Iscuz ma c'babiten, a c'houlan,  
Prest è ma c'halon da rannan :  
Me gleo cleier Caouen o son canvo,  
D'am mammic paour a zo maro.  
— Penos a outes clevet ane,  
Ha te pemp cant leo dioute ?  
— O troad var ma hini lequet  
Hac evel-d'hon-me o c'hléfet.  
— Dalet-ta ho conje, Garen,  
Hac en em rentet e Caouen. »

Garen a Bris a vonjoure,  
E bourg Caouen pa arrue :  
« De bonjour dec'h-hu, Caouenniz,  
Petra a zo a neve n'hoc'h illiz !

— Garenn, na comprenomp netra,  
Ni en assur en quement-ma.  
E man ar c'hlejer o son tris miz-so,  
Hep ma zo den ben var o zro.  
Tri miz zo e maint er guiz-ze,  
Hep ma neuz den touchet out-he

Garen ar Brís a lavare,  
An nor var e vamm pa diore :  
« Me vel ma mamm, ez oc'h dilezet  
Aboue c'hom-me partiet,  
Raç var an treuzo a velan  
E c'he lezet ar ied da divoan.  
Pa antreas ebars an ti,  
Ar Verc'hes voa ouz e lieni,  
A vriet ne vamm e croquet  
Ha var ar plas e c'he marvet



## AR MEMEZ TRA

« Ar bed-oll, eme lann goz, a gemer eur stum fall,  
Neus chomet war an douar ma netra vel ma oa gwechall  
Paour kez lann, c'hui zo chanced, dre m'och deued  
(da c'hriza :  
Mez ar bed a zo chomet memez tra, memez tra.

Goude al loar, ar steret hag an devalijen,  
Gaod an heol bep mintin e par ar sklerijen  
Bars an oabl an alc'hueder a zao en eur gana,  
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Gant he chupen erc'h skornet, pa zeu ar goan gri  
Da c'hourda hon bizied ha ruia hor fri,  
An eil demeus eguale daou bried a dosta  
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Ar vugale a zo breman begek, beo a zeder :  
War meur a dra int gwiek arog goud ho Fater,  
An avalo hanvrued o blij d'he ar muia,  
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Ann diaoul a gollas Eva, bepred a zo temptuz,  
Ar merc'het koant a zo atao bresk ha sentuz ;  
Demeuz ar frouez diffennet, kalz ziouaz ! a glaova,  
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Potret a weler bemde ho wapad merc'hed ;  
Merc'hed a weler bemde ho kaketal potred ;  
Touet kalz, derc'hel neubeut, a zo ar c'hiz brema ;  
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra,

Nemet ar brago toui-gwis, al lero marelet,  
Ar jeleuten kov-iodeck, ar berulen ponltret,  
Pez a chom a zo chomed ebars ar stad ma oa,  
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

*Propriété*

(Propriété).